

# Sòn Kermess Henvik

*Allegretto.*



Deut da we - let gou - de lein, l'ò-tred yaou-ank Kas-tel,



a zo ka out - chou noe'chein hag en o cha ri - tel. A - lo,



gwa-zed, a - lo, mer-c'hed, deut bu-an da dan - va ha da

1<sup>re</sup> fois 2<sup>e</sup> fois



we-let ha da gle-vet an traou du-di - us - sa. Al - ló sa.

1

Deut da welet goude lein  
*Potred iaouank Kastel*  
A zo kaoutchou 'n 'ho c'hein  
Hag enn ho charitel.

2

Deut d'ho gwelet eur weh c'hoaz  
Gant o rener Yfik  
*'Ch ober jimir*  
*'Vel ar c'has Minettik.*

3

Deut d'ho c'hlevet o c'hoari  
Gant eur bern muzikou  
Hag oc'h ober cholori  
Gant ho zabolliou.

4

Deut da glevet diskleria  
*Peziou-c'hoari fentuz*  
Ha diwallit da zounna  
O c'hoarzin re founnuz.

5

Sellit ouz ar *Prézidant*,  
Prézidant foar Henvik,  
Evel eur Roue, rampet-dant,  
Var gein he goz-mourrik.

6

Ar c'hermess a zo digor :  
Oll ebarz, Henvigiz,  
Oll ebarz, tud ann Arvor,  
Paganiz, Kerneviz!

7

Tennerien, ma tennit mad,  
Kerzit d'ar c'honkouriou,  
Evit gounid eur zac'had  
Euz ar c'haerra priziou.

8

Skoerien, ma skoit just,  
Kroguit er voloten,  
Ha kassit monsieur Gugus  
Da ruilh var he groc'hen.

9

Gant ar rod o vont enn dro  
*'Vit priz eun tam butun*  
Peb c'hoarier a c'hello  
Gounid eur pez-fortun.

10

Prenit *lampou elektrik*,  
Prenit eur boutegad :  
N'euz nemed en Amerik  
Evit kenkoulz marc'had.

11

Deut da welet eur *Sorser*,  
Eur c'hoz famik lakez,  
A zo par da Lusifer  
D'ober diaoulerez.

12

Pa ve *strobet 'vel eul leuc*  
Gant an teoa kerdin,  
Abenn eur munut goude  
*'Vo 'n he zav o c'hoarzin!*

13

Deut da welet ar *stourmad*  
*Chachadek ar garden*  
*'Tre dieu vanden potred vad :*  
Tom e vo 'n abaden!

14

Ma peuz c'hoant da *jaseal*  
Eb na ki na furet,  
Eur pez a bevar real.  
Ha dao d'al lapined.

15

Ma peuz c'hoant da *besketa*  
Eb na bag na roued,  
Gant an ighen disterra  
Dao da baka pesked.

16

Venez gagner les *gros lots*  
De la loterie,  
Pour faire de jolis cadeaux  
A Yan ou Jeanic.

17

C'est la boutique à l'envers,  
L'on reçoit, l'on donne,  
*Toujours gagn', jamais l'on n' perd,*  
Quand on fait l'aumône.

18

Pa po sec'hed, it buan  
Tost d'ar *c'hontoueriou*,  
Ha bonjour da Varijan,  
Bonsoir d'he bouteillou.

19

*Limonad, bier ha gwin,*  
Gwin hag a oar lamet,  
Ho lak aio da c'hoarzin  
Evel tud penfollet.

20

Ma peuz naoun, it da danva  
*Krampouez muzik Thérèz,*  
*Kuignou Jeann ha Franseza,*  
Ha mil *lipouzerèz.*

21

Ha ma chommont ouz he staon,  
Kit da gemer goude  
*'Vit ho c'hass buan d'ann traon,*  
*'R banne thé pe gafé.*

*Diskan :*

Alo, gwazed; alo, merc'hed,  
Deuit buan da danva.  
Ha da welet ha da glevet } *bis.*  
Ann traou duduissa.

P. Tr.